

### Dun otro deus plistin.

march' plich ganech' sileoet  
 ag e cleofet cana  
 eur chanson divertissante  
 Zo groet evouit ar bla.  
 Gret d'un den chentil yaouanc  
 deus a parouss plistin  
 zo savet d'eus e woele  
 eur merher mad mintin

Zo savet deus e welle  
 eur merher mintin mad  
 ewid mont da chasseal  
 Da valle dre e coat  
 ewit mont da chasseal  
 Da walle dre e coat  
 ag e rencontre eur merchic yaouanc  
 e vont da palluhat.

Bonchour derch merchic yaouanc  
 e het na ne noch' bed  
 Derhet gant ar voenojen  
 na veet quet collet.  
 — en eel emei otro  
 me o ped ma excuset  
 Quen ma voan deud deus ar guer  
 me a voa divunet.

Quen ma voan deud deus ar guer  
 me a voa divunet  
 eur voeach al e voan bed  
 na ne <sup>in</sup>voan quet manquet.  
 — ag een e oulen outi  
 na pe noad e devoa  
 — en eal e mei otro  
 an oad a travar bla

Deud tu ganni merch yaouanc  
 Deud tu gani dam zi  
 ma henout om daou assemblez  
 nag eouit dijuni

en eel emei otro  
 mo ped ma excuset  
 quen ma ouan deud deus ar Guer  
 me amoia dijunet.

en eel amei otro  
 mo piche bed lin cras  
 Dam Goul digant va moereb  
 da vont duse varhoas  
 En eel a mei otro  
 D'ar poan a comeret  
 mo piche ar vadeles  
 dam goul d'eus ma mouereb.

o coul digant a moereb  
 a houi na deuferch quet  
 ne ont quet merhic yaouanc  
 a houi a ve manquet.  
 en eel emei otro  
 Non qued d'eus ar sors ze  
 a quoisquoode e lirir  
 et on unan ane.

en o ti emei otro  
 an Treizer et voa laret  
 em moa me Guenou dibren  
 Couscoude na meus quet  
 em moa me Guinou dibren  
 na ne voan me quet coant  
 Ne med ma me feçon vad  
 a ma oan patient.

Leret tu din merch yaouanc  
 Piou a n'eus derch *restet* (1)  
 ar pes a oua bars em zi  
 an eiz eur da nos laret  
 en eel emei otro  
 non quet d'eus o contre  
 n'allan qued anaveout  
 an eil d'eus e Guile.

*même écriture que celle du fol. 78 recto et verso. Canouen dud yaouanc.*

(1) Ce mot restet est douteux.